

Prizioù Lennege 2025

Unvaniezh Skrivagnerien Breizh
PRIZ PER-JAKEZ HELIAS e brezhoneg

Oberenn e brezhoneg
sammad ar prizioù : 500 €

Digor eo ar priz d'an holl skrivagnerien a sav oberoù e brezhoneg, dreist da 18 vloaz. Enoret e vo gant ar priz-mañ dreist-holl perzhioù lennege ar skrid. Kenstrivañ e c'hall ivez an embannerien a fell dezho lakaat o levrioù war wel.

Penaos kemer perzh ?

Kenstrivañ e c'hell an holl oberennoù o klotañ gant an dezverkoù meneget a-us,

bet embannet etre ar c'hentañ a viz Genver 2024 hag an unan ha tregont a viz Kerzu 2024.

Ret eo dezho kaout un « ISBN ».

Ret e vo d'ar berzhidi kas **teir skouerenn** eus o oberenn **araok an tregont a viz Ebrel 2025** d' ar chomlec'h meneget dindan:

Thierry Châtel
« Prix P.-J. Helias de l'As. des Ecrivains de Bretagne »
4, Garzh al laour bras
22780 Logivi-Plougraz

Kaset e vo pep skouerenn eus an oberenn gant ar follenn perzhiadegezh moulllet (ne vo ket degemeret ar follennoù niverelaet ha kaset dre bostel), gant an deiziad hag ar sinadur. Merket e vo titl an oberenn, anv an aozer, daveoù an embann, an niverennoù pellgomz ha chomlec'h postel ar perzhiad.

Ne vo ket dalc'het kont gant ar juri eus pennadoù meuleudius a-zivout ar skrid, embannet e kelaouennoù, kazetennoù pe en ur stumm all.

Ne vo kinniget nemet un oberenn dre aozer.

Ne c'hell ket kemer perzh un oberenn bet kinniget ur wech dija.

Pemp bloaz e ranko gortoz ul loread araok kinnig un oberenn all er rumm ma'z eo bet priziet.

Ne c'hell ket an droidigezhioù nag an adembannadennoù kemer perzh er genstrivadeg. An oberennoù enrollet pe niverelaet ne vint ket degemeret.

E brezhoneg e rank bezañ skrivet an oberennoù. Ar skouerennoù kaset ne vint ket daskoret d'an aozer pe d'an embanner. Berzet eo ouzh izili ar juri pe ouzh tud eus o endro tost kemer perzh.

En ur gemer perzh e asanter da holl reolennoù ha divizoù ar juri.

An aozourien a fello dezho kinnig ul levr a ranko hen ober gant asant o embanner.

Digor eo ar priz ivez d'an embannerien dindan memes divizoù.

Ur skrid-degemer eus an oberenn kinniget gantañ a vo kaset d'an emstriver (dre bostel nemetken).

Ar juri

Rakdibabet e vo gant an atebeg pe an atebegez war ar juri un dek oberenn d'ar muiañ dre rummad, araok an 31 a viz Mae 2025.

D'ar 15 a viz Mezheven d'an diwezhatañ e vo dalc'het kuzuliadenn diwezhañ ar juri hag an atebeg, aotreet ivez da votiñ. Tri aozer a vo anvet, en o zouez ul loread a vo embannet e anv en un doare ofisiel d'an deiz ma vo lidet ar prizioù lennegel.

Ur postel a vo kaset da bep aozer anvet. Ret e vo dezhañ kadarnaat, e teuio da Lid ar prizioù pe e teuio unan bennak en e lec'h, (ha se dindan 15 devezh adalek ma vo erruet ar postel). Ret vo dezhañ derc'hel kuzh diviz ar juri. Priz ar re ezvesant a vo roet d'ar re bet dibabet war o lerc'h.

->Ne vo ket digollet an tri aozer anvet evit o frejoù dilec'hiañ.

Lidet e vo ar Prizioù Lennegel e-kerzh miz Here pe e miz Du. An holl skrivagnerien o do kemeret perzh er genstrivadeg a vo pedet d'al lidadeg. E fin al lidadeg e c'hallo loreidi ar bloaz sinañ o levrioù en ul lec'h aozet evito.

Al levrioù rakdibabet hag an oberennoù priziet a vo lakaet war wel war lec'hienn U.S.B. <https://www.ecrivainsbretons.org> er rummad **Prizioù Lennegel** bloaz ar genstrivadeg.

Al luc'hskeudennoù tennet e-pad al lidadeg a c'hallo bezañ korvoet evit mad Unvaniezh Skrivagnerien Breizh, hep na c'hellfe den enebañ. Embannet e vint en linenn koulz hag an holl bennadoù diwar-benn al lidadeg.

Follenn perzhiadegezh amañ dindan :

**Follenn perzhiadegezh
PRIZ PER-JAKEZ HELIAS – e brezhoneg
Levrioù bet embannet e 2024**

Anv :

Anv-bihan :

Anv-pluenn (ma'z eus unan) :

Deiziad ganedigezh :

Chomlec'h :

Niverenn pellgomz:

Pellgomzer godell :

Chomlec'h postel (aes da lenn) :

Titl an oberenn kinniget :

Anv an embanner :

N° ISBN :

Deiziad an embann ([ne vo ket degemeret un adembannadur](#)):

Penaos hoc'h eus graet anaoudegezh gant Prizioù An Unvaniezh:

«O kemer perzh er genstrivadeg en em zisklerian a-du penn da benn hag hep mirout tra ebet, gant ar reolennoù embannet war lec'hienn an USB, ha gant divizoù ar juri, a vo hep engalv, ha se gant asant ma embanner. Testeniañ a ran war ma enor, n'eo ket an oberenn kinniget un adembannadur.»

Deiziad :

Sinadur :